

6.26mn

E Sant-Brieg eh eus ur plac'h yaouank...

E Sant-Brieg eh eus ur plac'h yaouank,
ge. Madoù, spered, ha bravitez,
Netra ne vank d'ar plac'h yaouank-se.

M'am boa soñjet a-c'houde pell amzer, ge
Kemer an tren e gar Pondi
Aveit monet da gomz doc'hti.

Me aet un deiz get man dilhad kaerañ, ge
Àr ma fenn un tog plouz nevez,
Ur chadenn aour doc'h ma c'hostez.

Pa oan arriv er gêr a Sant-Brieg, ge
O, me a yas-tre betek an ti
Ha me 'daolas ma zok dezhi.

«Boñjour deoc'h-c'hwi ! e lâran-me, joeüs, ge
Devezh mat deoc'h ha d'ho kerent !
Ma soñj a oa donet pell kent.

Mar plij geneoc'h, selaouit-me, plac'hig, ge
Daet on d'ho klazh aveit pried.
Eurus genin em gaveet.

E-tal Pondi me am eus ur gomenant, ge
E-tal ar Blavezh emañ savet;
Kaeroc'h 'veiti ne gavec'h ket.

C'hwi a glevo sonenn ar baiznted, ge
Gwell e kanomp en hur parkoù
Èl ma kanit en ho kêrioù.

Na c'hwi ho po laezh dous hag amannenn, ge
Ha chistr barrik sklaer èl an aour,
Chistr c'hwek ha mat, hep tapenn dour.

- Me 'yay geneoc'h, a lâr ar plac'h yaouank, ge
Met gortozit c'hoazh ur miz pe daou
'Veit ma vo plaenaet mat an traoù.

Gwir e lârit : an dud àr ar maezoù, ge
En o farkoù a vev get joe.
Mard aont e kêr o devo ke[uz]

Lâret get **an Ao. Gicquel** a Vihui-Lanvaoz.
Kompozet get Stevan Kerhored (abad Ar Strat)
Enrollet get D. Carré en ur filaj e mirdi Sentegan, e 1988.
Lakaet dre skrid get D. Carré.
Tennet a zielloù enrollet KSK (KSK 04 ; 10)